


# Jeanne d'Arc



Ton : *Patronez douz-ar Folgoat.*

## Diskan

*Betec o tron en envou, o Jeann henor bro Franc  
E cassomp oll or peden, gant feiz ha gant fizians  
Enebourien an Ilis, a zar huel o fenn  
En o eneb deut buhan, deut buhan d'hon difenn.*

### I

O Jeann, en o iaouankis, pebes tristedigez !  
A zantit en oc'h ene pa zonzit 'n'hor bro gez !  
Beuzet eo o taoulagad, fraillet eo o calon  
O velet hor bro garet dindan treid ar Zaozon.

### II

O Jeann, sec'hit o taeloù, sellit var zu an Ei  
Ac'hano teuo sicour, dont a rei eb dalé  
Bro Franc a vo delivret gant eur plac'hig dister  
C'hui eo : stagit d'al labour, arabad coll amzer.

### III

O Jeann, deut eo evidoc'h, an amzer da guitaat  
Ar re a garit kement : breudeur, ha mamm ha tad  
Daoust d'ho rann-galoun sentit ouz o moueziou santel  
Ar Franc enn e angoni, a c'houlenn o scoazel.

#### IV

O Jeann, nag a vurzudou a ra dreizoc'h Doue  
O par da renn eur brezel, ne oue guelet morse  
Arme ar zaozon bodet, en dro da Orleans  
Ouzoc'h ne c'hell ket herzel ; tec'het a rank buhan.

#### V

O Jeann, goude Orleans, e trec'hit el leac'h all  
Hag enep deoc'h e clever, ar Zaozon o iudal  
Mes en despet d'ar gounar a very en o c'halon  
Charles Seiz a zo sacret, starteat eo var e dron.

#### VI

O Jeann, al labour dispar o peuz great beteg henn  
A dlefe tenna bennoz, mil bennoz var o penn  
Mez, siouas ! petra veler ? Heb dale oc'h guerzet  
Taolet 'n'eur prizoun heuzus, hag d'ar maro barnet.

#### VII

O Jeann, daoust ma peuz ato, bevet 'vel eur zantez  
Kredet zo bet goulscoude, caout abec enn o puez  
Gant eur barner digalon, touellet gant Satan  
Och condaonet da vervel, da vervel 'creiz an tan.

#### VIII

O Jeann, setu an tantad, a dle o merzeria  
Stracal ar ra ar flammou, hag prest int d'ho mouga  
Diou vec'h c'hoaz, hano Jesus, a gouez deuz o kinou  
'Vel eur goulmik oc'h ene, a nij prim d'an envou.

#### IX

O Jeann, deuz bar an envou, taolit brema eur zel  
Ouz ar vro o peuz karet, caret beteg mervel  
Dre o sicour hag o peden roit nerz hag fizians  
D'an dud leal a labour da zavetei ar Franç.